


EMSAV



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 9 - Gwengolo 1967

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV

30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

T a o l e n n

Gwerinveliezh	p. 223
Ezhommoù amemsavel an emsaver	p. 229
Notennoù armerzhel (8), ar c'horvoder : I. ar gopr	p. 236

GWERINVELIEZH

Evel ma verk ar ger e-unan, ez eo ar werinveliezh ar reizhiad politikel a laka an holl geodedourion e piaou d'ar veli hep derc'hel stad a renk, glad, brient (1) pe c'halloud a nep seurt : ar gwir hag ar garg he deus ar werin, ar bobl a-bezh, da embreger ar galloud politikel ha da leviañ ar Stad.

Kozh-tre eo e gwirionez keal ar werinveliezh. Diazezet e voe da gentañ e keodedoù gresian 'zo eus an henamzer, en Aten pergen; hag enebet e veze neuze ouzh an unveliezh (2) hag ouzh ar vrientinveliezh a gaved e-barzh keodedoù all. Ret eo merkañ evelato ne oa ket ar weriniezh (3) atenat, an demokratiezh atenat, ha hi patrom ar gweriniezhoù europat arnevez adal an 18^t kantved, ur weriniezh klok en abeg da ensavadur ar sklavelezh a lakae un darn vat eus ar boblañs er-maez eus ar vuhez keodedel ha politikel.

Dre vras ne voe ket pleustret ar werinveliezh e Roma, hag an impalaeriezh roman a voe, da gentañ, ur vrientiniezh a-raok treiñ d'un unpenniezh (3) kravezel : sellet e veze ouzh an impalaer roman evel ouzh un doue pe, da vihanañ, ouzh un danvez doue.

Padet eo seurt meizadur kravezel eus ar Stad a-hed ar grennamzer hag un darn vat eus an amzervezh vodern. Evel-henn e c'halled taol-ennañ urzhaz ar galloudoù neuze : el laez emañ Doue o ren ha galloud-egañ a ra ar rouaned evit pezh a sell ouzh aferioù ar bed-mañ. Heul-
iad pleustrek kement-se eo e veze graet eus ar roue leuriad Doue, ha rouaned 'zo a gemere roll ur "besdoue" hag a c'houlenne ur veli diharz war o sujidi, - evel ma empenned beli Doue e-unan war e grouadurioù. Ur skouer splann a unveliezh diharz eo ar roue gall LOUIS 14, - e chapel e balez edo ar fideled troet war-du ennañ e-pad an oferenn. Anat eo n'he deveze ar werin gwir ebet dindan hevelep galloud politikel doueelaet, nag emell ebet en aferioù ar Stad, - kounañ a reer respont ar monark : "Me eo ar Stad".

Notañ a ranker ne gasas ket pennaenn an doueleuriadelezh (4) betek seurt mac'homerezh bep taol, er grennamzer da skouer hag e grez diskar ar roueelezhioù. E Bro-Saoz, diwar ar grennamzer, e oa deuet ul lodenn eus ar boblañs da ziframañ un toullad brientoù digant ar roue ha da gemer perzh e buhez ar Stad. Hogen se a c'hoarv-eze en ur bobl a oa e chal muioc'h gant ar pleustrevezh eget gant ar meizerezh. Met zoken e Frañs, ne dizhas ket beli ar roue bezañ peur-ziharz en abeg da emrenerezh proviñsoù 'zo ha beli an Iliz hec'h-unan.

Ne luskas ar mennozioù da emdreif en Europa nemet e diwezh ar seitekvet hag e-kerz an eitekvet kantved, e Breizh-Veur hag e Frañs. Er vro-mañ end-eeun ez eo anavezet roll ar skrivagner ROUSSEAU, petra bennak ma ne rae ket hemañ, hag eñ galleg, ur gall anezhañ e-unan. ROUSSEAU an hini eo a glaskas un diazez nevez d'ar veli bolitikel. E-lec'h lakaat gwizienn ar veli e Doue, mestr pep den hag en Iliz, e amsavadez, e kavas gwell ober anezhi ar sammad eus an dilezioù graet gant pep hini eus ar galloud en deus warnañ e-unan. Unvennoud ar bobl a zeue da vezañ lezenn pep hini, ul lezenn ha na roe ket nemeur a lec'h d'an damantiz a-hend-all, - kravez ar bobl, da skouer, e ranke bezañ, dre ret, kravez pep keodedour.

Pennañ heuliad pleustrek ar gelennadurezh-se eo n'eus gwir doueel ebet, - beli ar rouaned a c'hoarveze eus ur gwir a-berzh Doue da embreger ar galloud. Youl ar bobl, n'eo ket Doue, setu diazez ar gwir : ar reizhveli a dermener enta evel beli a-berzh ar bobl, pe welloc'h, beli ar bobl, ha n'eo ket ken evel beli a-berzh Doue. N'eus nemet disentezioù ar werin, galloud ar werin, a gement a ve reizhwir (5) hiviziken. Pobl ur vro a c'hell disteurel forzh petore levrierezh, diskar forzh petore gouarnamant, distrujañ ar Stad zoken evit sevel unan all, - pe veur a hini, - en he lec'h; diouzh an tu all n'o deus al lezennoù talvoudegezh nemet diouzh ma'z int bet kavet mat, mouezhiet ha degemeret gant ar bobl. Tra ar bobl a-bezh eo ar Stad, ha levrierezh ar Stad a vez fiziet e dileuridi ar bobl, n'eo ket

ken e leuriad Doue. Pennaenn ar werinleuriadelezh a gemer lec'h pennaenn an doueleuriadelezh.

Daoust ha reishoc'h eo an eil pennaenn eget eben ? Lavaromp diouzhtu eo kudenn diazez ar veli ur falskudenn evit un darn. Roll ar Stad eo moarvat reiñ d'ur gevredigezh an tu da badout ha d'en em seveniñ diouzh an talvoudoù-stur kemeret ganti. En-dro d'an talvoudoù-stur-se end-eeun emañ ar gudenn, hag evel-henn e c'haller he dezrevellañ : an talvoudoù-se, hag-eñ en deus ar galloud politikel beli warno, pe, kentoc'h, hag-eñ n'emañ ket en o gwazoniezh ? Diouzh o zu, e vez alies an talvoudoù-stur-se lodek en ur veli all, diforc'h diouzh ar veli politikel, a lakaimp dindan an anvad ledan a aotrouniezh speredel. Ur skouer anavezet-mat eus an aotrouniezh speredel eo an Iliz; skouerioù all zo da reiñ : ar brederourion, ar veizourion, ar skrivagnerion, an arzourion, h.a. Drezo holl e vez bastet d'ar gevredigezh ar vagadurezh speredel na ve ket evit bevañ hepti, e vez roet dezhi ar sturiadoù a zo re he buhez donañ ha padusañ. Hogen ivez, hep ar Stad a zo enni evel he c'horf-eskern hag en-dro dezhi evel ur goudor diogel, ne ve ket ar vuhez-se evit padout, - da gentañ-holl ne ve ket evit diwanañ. Setu perak ez eur aotreet da c'houlenn hag-eñ n'eo ket an damant d'an talvoudoù a zo kalon ha gwad ar gevredigezh unan eus diazezoù ar veli politikel. E-lec'h termenañ diwar skañv hag er c'houmoul ar reizhwir hag ar reizhveli evel perzhioù-hud ar werin pe un dileuriad a-berzh an neñv, hag-eñ ne ve ket gwell en em ziskouez uveloc'h ha diskenn war an dachenn evit muzuliañ reizhwir ha reizhveli en oberoù pemdeziek ar galloudoù politikel o ren ?

Rak-se moarvat n'eo ket kudenn ar reizhveli digoulz evit an Emsav. Ent-istorel eo arabat ankouaat e voe prederiet darn eus ar stourmerion pell amzer gant ar gudenn-se. Da skouer, etre an daou vrezel e oa nec'het paotred ar Bleun Brug dre ma ne felle ket dezho en em harpañ war sturienn "dizoue" an Dispac'h Gall "gwir ar pobloù d'ober diouto ar pezh a garont" (6). Klask a raent proufiñ pegen reizh-

wiriek e oa an emrenerezh a c'houlennent evit Breizh dre arguiñ diwar feur-emglev 1532, hep merzout ne oa bet ar feur-emglev-se nemet frouezh un emgav a nerzh ma oa an tu-kreñv ennañ gant ar C'hallaoued. Klask un diazez-reizhveli e seurt degouezhennoù zo lu. Peogwir e oant katoliged n'o doa d'ober nemet kounaat an diskoulmoù dibabet gant an Iliz e troioù heñvel : n'he deus graet nemet reiñ hogos bepred he siell d'ar galloudoù diazezet war an nerzh ha berzh an armoù. Se a voe gwir en amzer Klotwig, roue ar Franked, ha diwezhatoc'h, e grez e warlerc'hiad Napoleon, impalaer ar Frañsizion.

Furoc'h eo enta barn ar reizhveli evel reizhded embregerezh ar veli ^{er stad} e-lec'h klask prouiñ ar reizhded-se o taveiñ d'un diazez mojennek ezeo gwell studiañ an darempredoù war an dachenn etre ar galloud politikel o ren hag ar gevredigezh renet gantañ. Setu dres diazez hor gwir da adsevel ur riez vroadel er vro-mañ. An doare nemetañ eo ivez da reiñ un diazez ergorel da reizhwirieghez an Emsav : peogwir ez eo distrujer talvoudoù-stur ar gevredigezh vrezhon ha riviner madoù ar vro eo e tleomp, gant reizhwir, distrujañ ar galloud gall e Breizh, ha lakaat en e lec'h ur galloud a zamanto da sevenadur ha da vadoù ar bobl vrezhon, - en damant-se e vo diazez e reizhveli. Diziouerus eo moarvat asant ar bobl d'ar Stad ha d'he galloud; an asant-se avat n'en deus ket an dalvoudegezh nevet, hud, a wele warni ROUSSEAU, met un dalvoudegezh pleustrek : ar Stad hag ar gevredigezh o deus d'en em glevout ent-pleustrek, war an dachenn bemdeziek, a-zivout ar madoù hag an talvoudoù-stur a vo miret ha diorreet ganto.

Gwelout a reer en diwezh ez eo enk ha resis tachenn ar werinveliezh. Bevennet eo gant mennad ar Stad a zo lakaat holl dud ar bobl gwitibunan da vezañ lodek er vuhez politikel, o vezañ ma ne c'hell den diorren e zenelezh anez e framm ar gevredigezh e ve. Pal ar Stad werinel eo enta kevarzhelaat ar bobl ar muiañ gwellañ, ha doareoù pleustrek ar werinveliezh n'o devo talvoudegezh nemet diouzh ma vint un hent da dizhout ar pal-se end-eeun. E gerioù all, ar pal

eo reiñ d'ar bobl an tu da gemer skiant eus he c'hudennoù ha da glask hec'h-unan an diskoulmoù dezho : gouest e tle dont da embreger he rezid.

An dalc'h eo gouzout pegoulz e c'hell ar bobl embreger he rezid. Sklaer eo ne c'hell ket pobl Vreizh henn ober er mare-mañ. Dindan gazel-gae emañ gant ur Stad estren ha na zalc'h kont ebet eus he mad-hi. A-se n'eus ket lec'h d'ar werinveliezh e Breizh er mare-mañ o vezañ ma n'omp ket, Breizhiz, evit kemer disentez ebet war aferioù hor bro, - dindan estrenveliezh emaoamp. Dre-se, ar gannaded a zo bet anvet e Breizh dindan ar gouarnerezh gall n'o deus evel just reizh-wiriegezh ebet : ne leuriadont den. Ur sottoni e ve. derc'hel kont anezho, da skouer, o vont d'o c'haout evel pa vijent dileuridi ar Vrezhoned. Deomp pelloc'h : en ur riez vrezhon zoken n'en defe dilennadur da gannad un den na oufe ket e yezh, eleze un den ha n'en defe ket graet anezhañ e-unan ur Brezhon, reizhwiriegezh ebet, dre ma tennfe seurt dilennadur da zistrujañ ar riez vrezhon en diwezh.

E gwir e c'haller lavarout e krog atav ar werinveliezh gant an dispac'h a zaskor he frankiz d'ar bobl, petra bennak ma n'en deus an dispac'h dioutañ e-unan netra da welout gant doareoù ar werinveliezh klasel. Pezh a c'hoarvez er mare-mañ war gevandirioù 'zo a skeudenn ervat an devoud-se (7). Galloudoù mac'homer 'zo, politikel hag armerzhel, ne c'hellont bezañ torret nemet dre an nerzh. D'ar c'houlz-se e teu ar brezel dispac'hel da vezañ pazenn gentañ ar werinveliezh dre ma tistruj ar galloud mac'homer en ur reiñ d'ar bobl an tu da emouezañ ouzh he c'hudennoù hag a-se da glask un diskoulm dezho.

(1) Brient g., gwir-dreist, gwir piaouet gant tud 'zo hepken.

(2) Unveliezh b., reizhiad politikel a laka ar veli e kerz un den nemetken.

Galloud ha beli a ziforc'her evel-henn : ar galloud zo anezhañ ur vestrone pe diferet evel ur gwir, pe embreget er-maez eus hag

nikire fe c'hoaf Lambert

a-enep d'ar gwir diferet; ret eo merkañ ivez e c'hell ar gwir diferet e-unan bezañ barnet da reizh pe da zireizh, - da skouer, ar gwir diferet e Breizh gant ar Stad C'hall a varnomp da zireizh; alese ar c'healiou a reizhwir, reizhwiriegzh, reizhveli a gaver er pennad. Gant ar c'healiou-se e lakaer e penn-kont daou seurt gwir : an hini a varner, da lavarout peurliesañ ar gwir evel ma' z eo diferet gant bonreizh pe lezennoù ur vro, hag ur gwir all sellet evel gwelloc'h diazezet o talvezout da vuzul evit barn an hini kentañ, daoust ma n'eo ket bet diferet c'hoazh dre vonreizh na lezenn ebet. Da skouer, ar gwir o deus Breizhiz da sevel ur Stad vroadel a embannomp evel reizhwir; hag ar gwir diferet gant al lezennoù gall n'en deus reizhwiriegzh ebet e Breizh.

(3) Gweriniezh b., Stad politikel diazezet war ar werinveliezh; riez urzhiet e gweriniezh.

Mat eo termenañ arver politikel ar ger gwerin hag e zevedoù :

- a) gwerin b., ar bobl a-bezh, ster degemeret er pennad-mañ; tud ar renkadoù izelloc'h, enebet ouzh ar vrientinion;
- b) gwerinel ag., a natur gant ar werin; ster politikel : a natur gant ar werinelezh pe ar werinveliezh;
- k) gwerinelezh b., natur, dere, h.a. ar werin; ster politikel : nep reizhiad kevredigezhel, politikel, h.a., o kemer diazez war ar werin;
- d) gwerinek ag., db. un emzalc'h, ur preder, un ober, h.a., o klotañ gant ar werinveliezh, an uhelvennoù anezhi, h.a.
- e) gwerinour, gwerinelour g. & ag., dalc'hiad ar werinveliezh, ar werinelezh;
- f) gwerinveliezh (sl. derou ar pennad); g) gweriniezh.

Strolloù deveradoù kevelep a gaver ivez a-zivout ar reizhiadoù politikel all : a) brientin g., den a renk uhel, dezhañ brientoù; b) brientinel; h.a. f) brientinveliezh; g) brientiniezh.

a) unpenn g., roue, den o vezañ e-unan e piaou d'ar veli politikel; b) unpennel; h.a.; d) unveliek; e) unveliour, unpennelour; f) unveliezh; g) unpenniezh.

An termenou estren a arverer dreist-holl e-keñver an Istor : demokratel, demokratiezh, demokrat, monark, monarkiezh, h.a.

(4) Doueleuriadelezh b., pennaenn hengounel a rae eus ar roue leuriad Doue.

Kravez b., ar relijion, ar relijielezh, sellet evel devoudoù.

(5) Reizhwir, reizhwiriek, sl. an notenn 2) amañ diaraok.

(6) Arveret e voe ar sturienn-se ent-devoud gant ar C'hallaoued evit didamall destagidigezh rannvroioù alaman 'zo skrapet ganto da geñver brezelioù ar Republik Kentañ, - hag ivez gant Renan, da skouer, evit reizhheñvelaat enteuzadur Breizh e Frañs.

(7) E-barzh Kelc'hlizher PAOL VI : Populorum progressio ez eo damveneget kudenn ar brezel dispac'hel er broioù isdiorreet. Ar rezid n'eo gallus nemet en tu-hont da frankiz ar bobl.

EZHOMMOU AMEMSAVEL AN EMSAVER

Amemsavel a verk amañ ne denn ket an ezhommoù meneget da labour an Emsav e-unan. Ezhommoù buhezel ha kevredigezhel an emsaver eo enta a vo studiet en displegadenn-mañ.

Un den etre div gevredigezh eo an emsaver. Daou dalbenn a gemerimp evit pouezañ war forc'hellegezh ar saviad-se : an emsaver evel den div gevredigezh, an emsaver evel den hep kevredigezh.

An emsaver evel den div gevredigezh.

An div gevredigezh zo a) ar gevredigezh vreizhat gallekaet hag enframmet gant ar galloud gall b) ar gevredigezh vrezhon emañ an emsaver o krouiñ.

An emsaver hag ar gevredigezh c'hallekaet

An emsaver keodedour gall.

Ar galloud o ren e Breizh, ar galloud gall, zo da vezañ distrujet. Arabat avat d'an emsaver krediñ e c'halla eñ evel hinienn distrujañ, pe zoken distresañ un disterañ, ar galloud gall.

Ne anavez d'ar galloud gall beli ebet war Vreizh, - da lav-arout eo ne anavez gwir ebet da c'houarnamant Frañs da ren e Breizh. Padal, ent-devoud e rank anaout emañ Breizh dindan renerezh ha mererezh ar gouarnamant gall. Muioc'h, keit ha ma vo ar mererezh gall ar mererezh nemetañ e Breizh, en devo ar brasañ ezhomm anezhañ hag e tamanto d'an urzh vat anezhañ. Evitañ da gavout skeudenn emgann Ballon muioc'h d'e c'hrad, ez eo lun flammik ar c'hilhog gall a bego war gorn e lizheroù.

Eus emzalc'h an emsaver evel hinienn rik eo e komzomp amañ, n'eo ket eus oberoù an emsaver kefridiet gant an Emsav. Evel just, kerkent ha ma laka an emsaver kefridiet e droad war an dachenn, e

↓
Commissaire
Chef
Chef d'office

skar dillo tudenn ar c'heodedour gall o sachañ ganti he damantoù daoudroc'h d'an urzh vat er framm gall.

An_emsaver_ezel_eus_ar_gevredigezh_vreizhat_c'hallekaet.

Pal an Emsav eo degas ar Vrezhoned da grouiñ ur vroad dieub diouzh pep galloud estren, da lavarout eo gant ur galloud brezhon ouzh he ren.

Aze c'hoazh eo dav diforc'hañ an emsaver kefridiet diouzh ar peanv war ar straed ez eo e-maez kefridi. N'en deus ket, war zigarez ma c'hwezh avel Walarn, da gregiñ gant an dispac'hadeg war al leur-gêr deiz ar marc'had. Amoet eo e ve ezhomm da zisplegañ n'eo ket un emsaver un emsav drezañ e-unan. Amoetoc'h c'hoazh avat an emsaverion-se a welomp o c'hoari emsav bihan pep hini en e gorn.

An_emsaver_preveziad.

Koulskoude, n'en deus an emsaver digarez ebet da reiñ harp d'ar galloud gall pe d'ar stuzegezh c'hall pa c'hell ober a-hend-all :

- evit reiñ d'ar Vrezhoned c'hallekaet un testeni eus an Emsav;
- evit e vad dezhañ e-unan, ha mad e diegezh, p'en deus unan; e zlead groñs eo reiñ korf kevredigezhel d'e emsaverzh en e vuhez prevez ha tiegezhel : kentanvioù brezhon d'e vugale moarvat, met dreist-holl ar brezhoneg er gêr, darempredoù prevez renet gant an damant ouzh al labour emsavel; dre-se e ro un hent-seveniñ d'e zispac'h buhezel (kraf a adkavimp pelloc'h).

Bevennoù_an_emsaverzh_prevez.

Aze e rankomp spisaat daou seurt preder :

- ne dle ket an ober prevez enep d'ar galloud ha d'ar stuzegezh c'hall koustañ keroc'h eget na dalvez. Hent an emsaver n'eo ket hini ur c'hamikaze, ur c'hadour a'n Ankou, - diwallomp diouzh pep romantelouriezh. Ar pal n'eo ket bezañ kelienn e soubenn ar Gall, met aozañ ur c'horf kevredigezhel ha stadel a gemero lec'h ar c'horf kevredigezhel ha stadel gall er vro-mañ;

- dleout a ra an ober emsavel prevez bezañ bepred un testeni gwirion ha spletus eus an Emsav e-keñver ar boblañs c'hallekaet.

Pep istrogellerezh zo da skarzhañ didruez. Koun hon eus dalc'het eus ar familh-se a c'hallegerion a roe d'he bugale kentanvioù an digunvesañ gwellañ; pe eus an oristal a rae goap ouzh tud ar vro pa hetent ar bloavezh mat dezhañ; evitañ e oa deraouet ar bloavezh abaoe gouel Samon, d'ar c'hentañ a viz du. Ar blijadur da vezañ iskis, pe da feukañ, pe d'en em dennañ er-maez eus ar gevredigezh voutin n'o deus netra da welout gant an Emsav.

Mat eo gouzout ivez ez eus ^{basal ar} er stuzegezh o ren e Breizh, stuzegezh hiron ha diwriziennet ma'z eus, elfennoù mat, a zleomp doujañ dezho, ha n'eo ket o disteurel war an digarez n'int ket emsavel war-eeun na diouto o-unan. Seul aesoc'h eva d'ar stuzegezh nevez diazezañ er vro ma ouezo amprestañ muioc'h a elfennoù digant ar stuzegezhioù kozh. Daouarn ampart ha kempouez a zo ezhom m'az e ivez, ha n'eo ket daouarn fourgaserion.

Kudennoù diaes a vo da ziskoulmañ evit gwriziennañ an dud e Breizh. N'eo ket dav ma teufe meskerion a nep seurt da luziañ an darempredoù etre an Emsav hag ar Vrezhoned all.

An_emsaver_hag_e_zimeziñ.

Kontit en-dro deoc'h niver an emsaverion hag an danvez emsaverion a zo bet diskaret dre o dimeziñ. Savit mar karit stadegoù ha jedit ar feur-diskar; uhel eo. Didouellañ an dud yaouank zo d'ober, ha war zifrae :

- arvarus eo d'an emsaver derc'hel darempredoù a vignoniezh er-maez eus an Emsav;

- marvus eo dezhañ hogos bep taol dimeziñ er-maez eus an Emsav.

Lavarout a rit : tu a zo da zimeziñ gant un den ha n'emañ ket en Emsav c'hoazh, hag e zegas d'an Emsav goude. Respont a reomp : nann, degasit eñ pe hi d'an Emsav da gentañ ha dimezit goude. N'eo ket pa vezer lammet er vag ez en em glever gant ar c'habiten war bal ar veaj.

An_emsaver_hag_e_vicher.

Komz a reomp amañ eus al labour bevañs ha n'eo ket eus al labour Emsav. Moarvat e teuo un deiz ma c'hallio tud eus an Emsav

dilezel o micher vevañsel evit en em ouestlañ penn-da-benn d'o micher emsavel. N'emañ ket aze ar gudenn. Evit ar re all, evidomp holl bremañ, e vez ret kemer micher er gevredigezh c'hall. Anat eo o deus un niver a emsaverion dibabet o micher hep derc'hel kont eus an Emsav, pe hep rakjediñ heuliadoù o dibab war o buhez emsaver, - dre verrboell, dre verrweled, pe c'hoazh peogwir e tiazezent o jed-adurioù war diaweladoù faos : ne verzent ket ez eo an Emsav un embr-egerezh a hiramzer ha gwir vicher an emsaver. Daou seurt abegoù a zle dont e penn-kont pa zibab an emsaver e vicher, ha goude-se, e c'hourc'hwel :

- abegoù a gedvuhez :

dleout a ra ar vicher reiñ an tu da gemer renk er gevredigezh, ha dre-se da zerc'hel war an dachenn lec'h ar gevredigezh vrezhon da zont. Da gentañ e-keñver douaroniezh : tu zo moarvat da vezañ emsaver brezhon e Paris pe e Canberra, met, evit brasniver an emsaverion, emañ o flas e Breizh; d'an eil, e-keñver savlec'h er gedvuhez : talvoudusoc'h a-galz e vo d'an Emsav ur c'hweluniadour eget ur c'hastell-an o vevañ en distro;

- abegoù a frankiz :

e vicher ne zle ket krennañ betek re war frankiz an emsaver;

- ken war e frankiz danvezel : amzer a-walc'h a zle chom gentañ evit seveniñ ingal ar c'hargoù fiziet ennañ gant an Emsav; ha war un dro, korvoder a-walc'h da ziogetiñ e zizalc'hted;

- ken war e frankiz speredel : e-keñver ar galloud gall da gentañ (diaes d'ur c'hargiad gall, d'ur soudard gall kemer perzh en Emsav); e-keñver frammoù all, evel an Iliz.

An emsaver hag ar gevredigezh vrezhon

Kentañ tra a rank an Emsav pourchas d'an emsaver eo diazezoù kevredigezhel stabil.

Emañ an emsaver dre ret er gevredigezh c'hall, ha war un dro emañ dre e youl er gevredigezh vrezhon o tiwanañ. Da lavarout eo, dougen a ra un tammig muic'h bemdez eus e vuhez da gemer harp war

ar gevredigezh vrezhon nevez. Houmañ, eviti da vezañ bihan, a rank bezañ seul stabiloc'h, seul greñvoc'h a se. Alese an ezhomm groñs, aotrounius en deus an emsaver da gavout frammoù dir en Emsav, - frammoù-labour ma vo e vuhez kefridiel sterniet start ganto, ha ma kavo, harp outo, e vuhez prevez he diogelded.

Arabat d'an dud sankañ el lec'hid. Soñjal a reomp en evezhiadenn graet goude drouziwezh 1945 gant un emsaver eus 1940, o kejañ e Paris gant ur plac'h yaouank a lavare dezhañ edo-hi en Emsav : "En Emsav emaoe'h ? N'hoc'h eus ket aon da bakañ laou !"

Hag ar frazenn a zeuas gant un den eus remziad an Eil Emsav, da geñver krouidigezh S.A.D.E.D., pa ne gave ket e oa dav sevel frammoù kreñv ha destrizhus : "Un embregerezh a youl vat eo an Emsav : arabat rediañ an dud. Deuet int en o frankiz. Ret eo o lezel en o frankiz".

An emganner o verzout edo en ur c'hinkladur kartoñs; ar c'hastellan...

An emsaver evel den hep kevredigezh.

Arvarus e vez bepred an tremen eus ar gevredigezh kozh d'ar gevredigezh nevez. Rak n'eus hent ebet treset en a-raok, - ne gomzomp ket amañ eus ar steuñvoù kelennadurel ha stummadurel evit degas an dud o tont d'an Emsav betek tachenn an ober; an tremen kalvezel a vez aozet gant ar steuñvoù-se; tremen kalvezel ha n'eo nemet ar c'hlokadur eus an tremen gwirion, a zo speredel hag a chom dre ret e-maez a bep steuñvadur.

Ne c'hell ar gevredigezh nevez bezañ anez distrujañ ar gevredigezh kozh. Emañ c'hoazh an hini gozh o terc'hel an dachenn, tra m'emañ lec'h an hini nevez muioc'h e youl an emsaverion eget er bed. An tremen eus an eil d'eben zo enta dre ret :

- un dispac'h politikel ha kevredigezhel,
- un dispac'h speredel ha buhezel : ar gevredigezh vrezhon nevez o tiwanañ en un doare diouzh youl an emsaverion, e rank ar Brezhon a zeu d'an Emsav dispac'hañ e youl da gentañ, da lavarout eo e spered hag e vuhez.

Hogen un dispac'h er youl hag er vuhez zo dre ret un dispac'h hiniennel. Hag er c'heñver-se ez eo an emsaver un den e-unan-penn :

den na tra er bed ne c'hell ober evitañ an dibaboù en deus d'ober. Gant ur rañved strizh war ribl an islonk e rank tremen.

E-touez an arvarioù niverus o tennañ d'an dispac'h hiniennel e verkimp an daou-mañ :

- distreiñ d'ar gevredigezh kozh, en ur genderc'hel da zarempred-iñ an emsaverion all; kemer hent an Emsav ha kilañ goude. Touellerion eus ar seurt ne vankont ket en istor an Emsav. Meur a anv-badez o deus bet; an hini brudetañ e voe : tousegi. Da vare ar giladeg veur goude an eil brezel bed o doa zoken an tousegi en em urzhiet war atiz ar galloud gall (1). Ur gwir bistri e voent evit an danvez emsaverion;

- chom a-sav ha sevel ur goudorig war lez an hent. Un touell all, linkoc'h : war zigarez m'en deus pellaet diouzh prederioù boutin ar bed gall ha ma ra war-dro un danvez brezhon bennak, ez eur techet d'ober diwar skañv un emsaver eus ar c'hampour. Meur a stumm a c'hell bezañ gant e c'houdor : peurliesañ ez eo un obererezh darnel na gas ket pelloc'h eget e vevennoù dezhañ; ne venegomp ket pleustrerezh ar foklor pe an henoniezh na douellont den, met kentoc'h al lenneg-egzh distag diouzh ar preder dispac'hel, ar sevenadur evit ar sevenadur, - a zo bet e-pad pell "opiom an Emsav" (2).

Ma ne c'hell ket an Emsav ober en o lec'h an dibaboù a ra emsaverion eus ar Vrezhoned, e c'hell aesaat an hent a gas war-du ennañ ha reiñ an tu da barraat ouzh arvarioù an hent-se. Da gentañ dre aozañ ur gelennadurezh spis, n'eo ket hepken war e balioù, met ivez warnañ e-unan, e istor hag istor e enkadennoù, en ur ziskouez bepred penaos en deus dienket ha trec'het a-benn an diwezh. D'an eil dre startaat bepred ar frammoù diogel m'emañ ar gevredigezh vrezhon nevez o tiazezañ warno tamm-ha-tamm.

Anat eo : abaoe ma labourer da ziazezañ frammoù stabil d'ar gevredigezh vrezhon ez a da get al ledemsavioù, - pe, da nebeutañ, e teu an dud a youl vat a oa kouezhet enno da anzav emañ an hent mat gant ar frammoù stabil-se.

Daoust da se, ez eo an hent eus ar gevredigezh c'hallekaet d'ar gevredigezh vrezhon un hent arvarus : hent an den e-unan-penn eo e meur a geñver. Setu perak ez eo ivez hent an den en e rezid. Gantañ e kav an tu da stekiñ ouzh skoulmoù donañ ha gwirionañ mab-den. Nebeut a skoazell en deus da c'hortoz a nep lec'h, - divarrek eo ar gevredigezh kozh da reiñ harp dezhañ, re bell emañ c'hoazh ar gevredigezh nevez, hag an Emsav, he furn a-vremañ, ned eo ket evit reiñ ouzhpenn ar pep reañ; dre-se e rank tennañ dioutañ e-unan, diouzh e varreg-zhioù denel, kement nerzh-krouiñ a zo enno, - da lavarout eo e rank diorren e bersonelezh, meiz, youl, anaoudegezh, awen, anez mont d'un distruj diremed.

Sonfarentane Da glozañ e lavarimp ez eo ezhommoù buhez an emsaver ezhommoù gwriziennel, brasoc'h ha donoc'h eget ezhommoù tud ar c'hevredigezhioù diazezet, ha dre berzh an Emsav emañ o ren e Breizh an amplegadoù ret da grouidigezh an oberennoù denel meur.

(1) Sl. Al ledemsavioù, Emsav 5/113.

(2) Sl. Youenn OLIER Opiom an Emsav, Tonkad 61, Preder 24-25, 1961

N O T E N N O U A R M E R Z H E L (8)

AR C'HORVODER : I. AR GOPR.

Termenadurioù disheñvel a ginniger evit ar c'horvoder hervez ar sell a gemerer. Lavarout a reer da skouer

- ez eo ar pezh a chom eus ar c'henderc'h ur wech ardalet ar c'hevala (sl. Emsav 6/185-7);
- ez eo ar c'horvo tennet gant pep oberer eus ar perzh a gemerer c'henderc'hañ;
- pe c'hoazh (HICKS) ar pezh a c'haller dispign hep mont paour-oc'h a-se.

E gwir ez eus ivez meur a seurt korvoderioù da studiañ, hervez ma seller ouzh korvoder hollel ur gevredigezh a-bezh, ur vroad (korvoder broadel), korvoder ur c'hevredad pe un embregerezh, pe korvoder un hinienn; pe c'hoazh hervez ma seller ouzh korvoder ul labourer, ur perc'henn kevala, ur perc'henn douar, pe un embreger. Dav eo deomp, da heul, rannañ hon notennoù e meur a bennad, ha studiañ da gentañ korvoderioù an hiniennoù hag ar c'hevredadoù, ha goude, korvoder ar vroad.

Renket e vez korvoderioù an hiniennoù hag ar c'hevredadoù dindan pevar zalbenn :

- korvoder an hini a zegas e labour hepken, pe ar gopr;
- korvoder an hini a zegas kevala : kampi h.a.;
- korvoder ar perc'henn douar ha, dre vras, kement gounid o tont dre berzh an doareoù naturel pe an degouezhioù diavaez : leve;
- korvoder an embregerion, eleze ar re a laka da dalvezout ar c'hevala, an natur hag al labour a zo en o c'herz : helv.

Stagañ a raimp gant studi korvoder al labour pe ar gopr.

Termenadur ar gopr.

Peurliesañ e vez roet arc'hant en eskemm d'al labour, e gerioù all, e vez kevuziet al labour. Pep kevuziadur avat n'eo ket ur gopr; evit ma ve unan, ez eo ret

- ma ve dalc'hiat al labour kevuziet, da lavarout eo ma ve al labourer e dalc'h ur patrom o verkañ dezhañ e labour, o pourchas dezhañ an danvez hag ar binvioù ret d'e seveniñ;

- ma ve sav pe feur ar gopr divizet en a-raok; da lavarout eo ma ve etre ar patrom, ar goprer, hag al labourer, ar goprad, ur gevrat (1) anvet kevrat-c'hoprañ; dre ar gevrat-c'hoprañ ez eo diferet e ro ar goprad e nerzh-labour e feurm d'ar goprer, - ha n'eo ket gwerzhañ disoc'h e labour a ra. Ur seurt kevrat graet en a-raok war un disoc'h na anavezet ket a reer anezhañ ur marc'had treziadek pe un treziad. Ur c'hevuziad treziadek eo enta ar gopr.

Ar gwerenner a c'halvan da lakaat va frenestr e-ratre ne vo ket va goprad : an arc'hant a roin dezhañ ne vo ket feurm e nerzh-labourat met priz dik disoc'h e labour. Heñveldra, an arc'hant a dalan d'ur c'hemener evit ur gwiskamant n'eo ket ur gopr, zoken m'hon eus en em glevet en a-raok war ar priz; rak gouestlet en deus hepken pourchas din ar gwiskamant, o virout ar gwir da ren al labour evel ma kar : war disoc'h e labour nemetken hon eus graet marc'had; ul labourer dizalc'h eo. Gopriddi a vo avat eus darbarer ar gwerenner pe eus ar wrierez implijet gant ar c'hemener pa zegemeront bep sizhun pe bep pemzektez ur gopr digemm; labourerion dalc'hiat int.

Gopr e traezoù ha gopr e moneiz.

Daou zoare a zo, a oa kentoc'h, da dalañ ar goprou : e stumm traezoù, e stumm moneiz. Diwar ar goprañ e traezoù avat e teue un dalc'hiadegezh kalz brasoc'h : n'en doa ket ar goprad muioc'h a frankiz eget ur bugel; n'en doa ket goar da zibab e-unan e vod-bevañ, e c'hoprer o tamantiñ outañ e-giz "un tad mat a familh", - alese an anv a "dadelouriezh" a lakaer war an emzalc'h-se.

En holl vroioù war c'hreantelaat e oa en em ledet ar goprañ e traezoù ur c'hantved 'zo. Anavezet e oa gant an anv "truck system": gopret e veze ar vicherourion diwar-bouez marc'hadourezhioù pe gant

jedoueroù na oant talvoudek nemet er stalioù perc'hennet gant ar patrom.

Berzet eo gant al lezenn ar goprañ e traezoù en holl vroioù hiziv. Un nemedenn hepken zo aotreet, evit an implijidi bevet ha lojet gant o implijerion, - nemet e rank al lodenn eus ar gopr talet e traezoù chom bihan e-skoaz al lodenn all talet e moneiz.

Gopr merkel ha gopr gwerc'hel.

Daou zoare zo da briziañ ur moneiz : pe zerc'hel kont eus ar sifroù merket warnañ, pe zerc'hel kont eus ar pezh a c'haller prenañ gantañ en ul lec'h ha d'ur mare; a-se, e komzer eus ar werzh verkel (a lenner warnañ) hag eus ar werzh werc'hel anezhañ (ar gwerc'h o vezañ an dalvoudegezh war an dachenn, an efedusted). E dalc'h ar prizioù emañ enta ar werzh werc'hel : anat eo e talvez muioc'h 10 lur pa goust 1 kg bara 0,50 lur eget 15 lur pa goust 1 lur ar bara.

Da heul e komzer eus gopr merkel, p'en dewerzher diouzh merkoù ar moneiz, hag eus gopr gwerc'hel, p'en dewerzher diouzh priz ar madoù hag ar gwazadoù boazietañ, a lavarer c'hoazh diouzh koust ar bevañ.

An div skouer a roomp amañ dindan a ziskouez penaos ne argemm ket bepred a-untu dre ret gopr merkel ha gopr gwerc'hel. Er pred p. e roer an hevelep gwerzhad 100 d'ar gopr merkel G.M. ha da goust ar bevañ, hag e tewerzher ar gopr gwerc'hel da 100 ivez dre an dave-adur-mañ : $G.G. = \frac{G.M.}{K.B.} \times 100$. Argemmadurioù diseurt a c'haller empentiñ eus ar pred p. d'ur pred p :

	Pred p.	Pred p	% argemm
Kentañ skouer			
G.M.	100	150	+ 50
K.B.	100	170	+ 70
G.G.	100	87	- 13
Eil skouer			
G.M.	100	80	- 20
K.B.	100	70	- 30
G.G.	100	114	+ 14

Anat eo ez eo splotusoc'h ar gopr 80 en eil skouer eget ar gopr 150 er skouer gentañ.

Gopr diouzh an amzer ha gopr diouzh ar pezh.

Meur a zoare zo da sevel ur gevrat-c'hoprañ. Divizet e c'hell bezañ e vo jedet ar gopr dre unanenn-amzer (dre eurvezh, dre viz-vezh), pe dre unanenn-labour (dre donenn c'hlaou diskaret, dre hektar eostet, dre re votoù oberiet). Dre-se ez eneber ar gopr diouzh an amzer hag ar gopr diouzh ar pezh labour, pe ent-verr : diouzh ar pezh.

Un hentenn jediñ n'eus ken aze, evel just : frankiz ne vez ket roet evit kelo d'ar micherour gopret diouzh an amzer e-keñver ar pezhioù, na d'ar micherour gopret diouzh ar pezh e-keñver an amzer. Anat eo ne chom ket ar goprer diseblant ouzh sav al labour sevenet pa c'hopro diouzh an amzer; nag ouzh padelezh al labour pa c'hopro diouzh ar pezh.

Kreskiñ a ra feur ar vicherourion gopret diouzh ar pezh : daougementet en deus etre 1900 ha 1960, - eus 34 % da 66 % e Frañs.

Gopr stroll.

E degouezhioù 'zo e c'hell ur bare vicherourion sinañ ur gevrat-stroll gant ur patrom, o ouestlañ seveniñ ul labour termenet en eskemm d'ur c'hevuziad-stroll merket en a-raok. Lodennañ a reont ar gopr-se da c'houde etrezo hervez perzhegezh pep hini hag ar c'hementad labour en deus graet.

Arc'hoproù, goproù argreskus.

Argreskus eo ur gopr pa vez lakaet e kont evit e jediñ a) ur feur-diazez diferet diouzh an amzer pe diouzh ar pezh, hiniennel pe strollel, ha, sammet outañ b) un dreistad divizet diwar berzhioù 'zo. An arc'hopr a reer eus an dreistad-se. Meur a seurt arc'hoproù ez eus :

- arc'hopr da berzhegezh al labour;
- arc'hopr d'ar gwerzhañ;
- arc'hopr d'ar c'henderc'hañ;
- arc'hopr d'an espern-amzer.

Meur a hentenn zo bet ijinet evit jediñ an arc'hoproù.

Gopr diouzh ar gourc'hwel.

Mui ouzh mui avat en armerzh arnevez e lec'hier al labourerion en ur skeuliad ergorel resis-kenañ, a zo skeuliad ar gourc'hwelioù. E roll en embregerezh ne vez ket ken roet d'ar micherour dre berzh un dibab war-eeun, met dre zaveññ d'ar bazenn m'emañ er skeuliad, d'ar gourc'hwel spis ez eo e hini. Evel just, ne chom ket e-maez kont e berzhioù labourer nag ivez meno e sternioù war e zivoud, met an elfennoù-se adalvezo dezhañ da gaout e lec'h, da sevel, er skeuliad. E dalc'h al lec'h-se, ar bazenn ma vez, emañ sav e c'hopr.

Setu, da skouer, skeuliad ar gourc'hwelioù evel ma'z eo bet savelet e Frañs e 1945 gant maodiern al labour evit ar vicherourion :

- Darbarerion (1. darbarer eeun; 2. darbarer arbennik)
- Gwezhour arbennik (tri derez : 1,2,3)
- Gwezhour perzhek (tri derez : 1,2,3)
- Gwezhour gourferzhek.

Bep ma'z emdro avat ar c'halvezerezhioù ha framm an embreger-
ezhioù e ranker daskemmañ ar skeuliad, derc'hel kont eus gourc'hwel-
ioù nevez, kemmañ lec'h d'ar re gozh, merkañ keñverioù nevez; en ur
ger ne c'hell ket mui skeuliad ar gourc'hwelioù bezañ sellet evel
diazezet. Dre-se ez eus diwanet un hentenn nevez er Stadoù-Unanet :
dewerzherezh ar gourc'hwelioù (Job evaluation).

Gopr-amaezh.

Ur reizhiad heñvel a-walc'h a gaver evit gopratur an amaezhiaded,
da lavarout eo ar gargidi hag ar gefridiaded o labourat er wazadurezh.
Ur gopr diouzh an amzer eo ar gopr-amaezh, ha talet e vez bep miz
peurvuiañ. Arc'hoproù a vez roet ivez d'an amaezhiaded e stumm
gwellentezioù, trizekvet miziad, h.a.; jedet e vezont diwar hended
an amaezhiad er wazadurezh, kenderc'husted e labour, h.a.

Emdroadur meizad ar gopr.

Ent-hanezel e tever dere ar gopr diouzh hini sklav an Henamzer.
Freuzet eo bet ar sklavelezh, nemet e chom e dilerc'h anezhi dalc'h-
iadegezh an den ouzh an den a gaver en hor mare evel azon ar c'hopr-

adelezh. E-lec'h mistri o prenañ sklaved ez eus patromed o feurmiñ nerzh-labour gopridi. Tennañ a ra avat ar c'heñver a zalc'hiadegezh da zic'harvañ hag ar pezh a zo gloazus ennañ ouzh dellid mab-den da steuziañ : termenet e vez gwirioù ar goprad, hag e broioù 'zo, ar gevredigezh hec'h-unan eo a gemer lec'h ar patrom prevez, o fiziout er Stad pe en aozadurioù reolet ganti an emell da urzhiañ an darempredoù etre al labour hag ar c'hevala. Hevelep emdroadur avat ned eo ket c'hoarvezet dioutañ e-unan : frouezh eo d'un emsaverzh dalc'hus hag emouziek.

Ur prantad kriz e voe derou an oadvezh greantel evit ar vicherourion. Didalvoudekaet en em gavas trumm al labour gremmel, ken ma stagas goprou al labourerion da gouezhañ ha da vont izeloc'h bepred. Rak, hervez ar mennozioù o ren en ampoent, re ar fiziokrated TURGOT ha QUESNAY, e ranked, hag e tleed, lezel gwikefre an nevid en he roll war dachenn ar gourc'hwel : o vezañ ma'n em ginnige kalz muioc'h a zivrec'hioù eget ma veze goulennet, e oa reizh an digresk a zeue war briz al labour. Priz "naturel" al labour a veze graet eus ar gopr evel ma tisoc'he diouzh c'hoari an nevid, ar gopr nevidek. Da savelenn natur e lakaed c'hoari an nevid ha war un dro da lezenn gevredigezhel, - dre berzh ur c'hemmesk er meizadoù, "lezenn dir ar goprou" e voe lesanvet gant ar sokialour Ferdinand LASSALLE he dezrevelle evel-henn : "Nepred ne dle ar gopr keitat tremen dreist ar pezh a zo diziouerus, hervez ar boazioù o ren er vro, evit ma talc'hfe ar vicherourion da vevañ ha da ouennañ".

Ur stourm taer-ouzh-taer a voe renet evit dieubiñ ar vicherourion diouzh an enkadenn griz ma oant lakaet dre ar c'hevezerezh greantel. Daou luskad bras a ziverzer er stourm hir ha liesek-se :

a) ul luskad a emzifenn a-berzh ar vicherourion o-unan, gant ar c'hweluniadoù (Sz.: trade-unions, Gl.: syndicats ouvriers, Al.: Gewerkschaften) b) ul luskad kefredel, a c'haller envel an emsay keyarzhelour, renet war un dro gant prederourion evel Karl MARX, gant politikerion evel LENIN, gant pabed evel LEON XIII, mennet da

dreuzfurmiñ ar gevredigezh a-benn diogeliñ, - forzh pegen disheñvel e ve an hentoù kelennet, - an dellid hag ar rezid da bep den.

- Menegiñ ne c'haller ken nemet un nebeut darvoudoù e-touez ar re aroueziusañ eus an emgann kevarzhelour etre 1830 ha 1936 :
- 1830 : ar bodadoù micherourion kentañ : kevarzheoù kenskoazell, c'hweluniadoù en Alamagn;
 - 1831-34 : taolioù-fourgas e Frañs, a-berzh micherourion ar sidan e Lyon pergen;
 - 1843-60 : urzhiadur ar c'hweluniadoù e Breizh-Veur;
 - 1841 : lezenn e Frañs o verzañ reiñ gourc'hwel d'ar vugale dindan 8 vloaz;
 - 1847 : Kevre Komunour Etrevroadel diazezet e London;
 - 1848 : Manifesto Komunour embannet gant MARX hag ENGELS;
 - 1864 : Unvaniezh Etrevroadel ar Vicherourion krouet e London (Kentañ Etrevroadelenn);
 - 1867 : Ar C'hevala gant Karl MARX, derou an embann e London;
 - 1868 : lezenn e Frañs oc'h anaout ar c'hweluniadoù;
 - 1871 : ar g"Commune" e Paris;
 - 1873-75 : an narodniki a "ya d'ar bobl" e Rusia;
 - 1875 : Unvaniezh Vicherourion Surusia, kentañ aozadur micherour e Rusia;
 - 1881-93 : lezennoù en Alamagn war ar gretadurezh kevredigezhel, ar re gentañ en Istor;
 - 1885 : ar c'hweluniad kristen kentañ e Lyon, Frañs;
 - 1886 : krouidigezh an American Federation of Labor;
 - 1886-88 : ec'hwelioù bras e Breizh-Veur;
 - 1889 : diazezidigezh an Eil Etrevroadelenn e Paris;
 - 1891 : kelc'hlizher ar Pab LEON XIII : Rerum Novarum war gendere ar vicherourion;
 - 1902 : Petra ober ?, levr LENIN o tiazezañ pennaenn an emouiziegezh dispac'hel, o tevoudañ er bloaz war-lerc'h :
 - 1903 : an disrann er Strollad Sokialdemokrat Rusian etre Bolcheviked ha Mencheviked;
 - 1905 : Kevrenn C'hall an Etrevroadelenn Vicherour (S.F.I.O.) diazezet dindan renerezh Jules GUESDE;
 - 1913 : krouidigezh Kevre Etrevroadel ar C'hweluniadoù e Zurich;
 - 1914 : ar c'hweluniadoù gall hag an S.F.I.O. o tianzav o gouestloù dispac'helour hag o treiñ a-du gant o gouarnamant er brezel enep Alamagn;
 - 1917 : Dispac'h Here : ar Strollad Komunour Rusian, leviet gant LENIN, a gemer ar galloud;
 - 1919 : Trede Etrevroadelenn (Komintern) savet e Moskov;
 - 1920 : krouidigezh ar Strollad Komunour Gall;
 - 1920 : kentañ Kefioù Goprou Tieghez e Frañs;
 - 1928 : lezenn e Frañswar ar gretadurezh kevredigezhel;
 - 1929 : freuz-yalc'h e New-York; derou an enkadenn-armerzh-ved;
 - 1931 : 20 milion a zic'hweleion er bed;

- 1931 : kelc'hlizher ar Pab PIUS XI : Quadragesimo Anno;
 1932 : lezenn e Frañs war ar goprou tiegezh;
 1936 : Talbenn ar Bobl e Frañs, ec'hwelioù, greantioù ac'hubet;
Emglevioù Matignon : sizhun bergont eurvezh, ehanoù gopret.

Evel a weler, e broioù Kornogeuropa ez eus bet kempenn, e Rusia, hag e broioù Retereuropa goude 1945, ez eus bet dispac'h. E-ser notennoù all, pa bledimp gant armerzh ar riezoù komunour, hor bo tro da studiañ penaos ez eo emdroet meizad ar gopr hag ar goprou o-unan war-lerc'h freuzidigezh perc'hentiezh prevez ar madoù-kenderc'hañ. Amañ e studiimp hepken an treuzfurmidigezhioù c'hoarvezet e broioù ar C'hornog. Lavaromp koulskoude, kent mont pelloc'h ez eo meizad ar gopr ha stad ar goprou evel m'emañ hiziv er bed, ken er broioù komunour, ken er broioù frankizour, frouezh ar stourmerezh kevarzhelour taer deraouet en 19^t kantved. Dre vras, e tenn ar reolenn : "da bep hini hervez e labour, dre c'hoari dall an nevid" da lezel he lec'h gant ar reolenn all : "da bep hini diouzh e ezhommoù", - da nebeutañ e komzoù an dud a Stad, hag e spered reoù anezho.

Kempennadur dere ar c'hopriddi

Pleustret ez eus bet meur a hent e Kornog evit reiñ o gwir d'ar c'hopriddi, pe da nebeutañ evit kacut ar peoc'h ganto. Dindan dri zalbenn e c'haller renkañ an hentoù-se : a) kompezañ an direizhderioù b) reiñ perzh d'al labourer e frouezh e labour k) goprañ al labourer nebeutoc'h evel oberer ar c'henderc'hañ eget evel ezel ar gevredigezh.

Kompezañ an direizhderioù.

1) Ar gopr izelañ ret. Pa gouezh ar gopr nevidek dindan ar feur izelañ ret d'ar micherour evit bevañ ha bevañ gant dellid, ez emell ar Stad evit rediañ ar batromed da reiñ ar gopr izelañ ret-se. Emelladennoù kentañ ar Stad evit derc'hel ar goprou a-geñver ar barr-bevañ izelañ dereat a voe renet en Aostralia hag e Zeland-Nevez e-tro 1894 hag e Breizh-Veur e 1909.

2) Ar skeul wint. Mar seller ar gopr gwerc'hel evel azas en un ampoent, e ranker sellout ar gopr merkel evel diazas adalek ma kresk

koust ar bevañ. Ijinet ez eus bet neuze ur reizhiad azasadur emgef-reek : bewech ma sav koust ar bevañ e sav ar gopr merkel e doare da zerc'hel digemm ar gopr gwerc'hel. Skeuliad ar goprou gwerc'hel a zeu da vezañ stabil, tra ma sav (ha ma tiskenn, da nebeutañ war ar paper) skeuliad ar goprou merkel da heul koust ar bevañ, - alese an anv a skeul wint, pe skeuliad wint. En doare-se e ve gwarantet ar c'hopriddi ouzh diskar o galloud-prenañ.

Meur a skoilh he deus kavet avat ar reizhiad-se war an dachenn, ha da gentañ an arvar ma oa da luskañ ur c'helc'h-bac'h, koust ar bevañ o reiñ sav d'ar goprou ha kresk ar goprou o reiñ lañs da goust ar bevañ, - "kelc'h diaoulek ar goprou hag ar prizioù". Er pleustr, e rankas ar gouarnantoù stagañ stardelloù kreñv ouzh ar rod-se a-benn mirout outi a bennfolliñ. Peurliesañ e vez bodet dileuridi ar c'hweluniadoù hag an embregerezhioù en-dro d'un tredeog anvet gant ar gouarnamant; e kefridi ar c'hengor-se emañ diferañ un emglev anvet c'hwelgevrat o tivizout doareoù al labour, feur ar goprou, h.a.

Reiñ d'al labourer perzh e frouezh e labour.

Lavarout a reer ez eo ar micherour minwalet pa n'en devez mui ger ebet da lavarout ur wech sinet gantañ e gevrat-c'hoprañ : evel ul loen mut eo, sterniet ouzh ar c'harr, ha berzh pe ziverzh an embregerezh ne sell ket outañ. Klasket ez eus bet lakaat termen da seurt saviad displead dre lakaat ar micherour da vezañ perzhiat en embregerezh; meur a hent zo bet arnodet :

1) Ar buzrannoù, pe ar berzhiadegezh war-eeun e buzadoù an embregerezh; degouezhout a ra d'ar micherour ur geitrann eus ar buzadoù ouzhpenn e c'hopr. Disheñvel eo ar vuzrann diouzh an arc'hopr, - hemañ ne vez nepred ur geitrann eus ar buzadoù; disheñvel eo ivez diouzh ar gwellentezioù ha largentezioù all profet gant patromed vrokus 'zo, - diferet e vez ar buzrannañ dre gevrat etre ar goprer hag ar goprard. Ar buzrannañ avat ne ro perzh ebet er c'hevala, evel ma ro an hent 2) amañ dindan, - ar vuzrann n'eo e nep doare ur gevran. An taol-arnod kentañ da berzhiadekaat war-eeun ar vicher-

ourion er buzadoù a voe graet gant un embreger eus Paris, anvet LECLAIRE, e 1842. An hent-se avat ne reas ket berzh ha nebeut pleustr-et eo hiziv.

2) Ar c'hevrannoù, pe ar berzhiadegezh er c'hevala, ar micherour o tont da vezañ kevraneg en embregerezh (2); teir reizhiad zo bet arnodet :

- aesaat d'ar vicherourion prenañ kevrannoù en embregerezh gant arc'hant o arboelloù; ar reizhiad-mañ ne reas ket berzh; pa dizh ar vicherourion arboellañ, ne vezont ket chalet gant prenañ kevrannoù er greanterezh;

- reiñ d'ar vicherourion buzrannoù, hogen ouzh o zreiñ e kevrannoù (ar reizhiad-mañ a reer anezhi copartnership, keveleriezh);

- ar c'hevrannoù-koskor; diskleriet e vez e-keñver lezenn an embregerezh evel "kevredad gant koskor kevraneg"; troet e vez un darn eus ar buzadoù e kevrannoù a vez lakaet da genberc'hentiezh ar c'hoskor. Rannalioù (3) a vez lodennet bep bloaz etre ar vicherourion, hag ar re-mañ a gas leuridi da vodadeg-veur ar gevranneion; ne hañval ket ar reizhiad-mañ bezañ graet berzh.

3) Hentoù all zo bet ijinet :

- ar gopr kenfeuriek, pe perzhiadekaat er c'henderc'hañ; bep bloaz e vez rannet etre ar vicherourion ur c'hementad arc'hant par d'un dregantad eus sav ar c'hengreadur (4);

*chite
S'effus*

- an deuriadekaat, a zo un taol-arnod renet e Frañs dindan levierzh de GAULLE, anezhañ lakaat ar vicherourion da gaout deur (5) ouzh kerzh an embregerezh; dre ar reizhiad-se e tennfe an "deuridi" o mad eus kement gwellaenn o c'hoarvezout gant an embregerezh, ken en e gevala, ken en e vuzadoù, ken en e genderc'husted. Seurt kempennadur avat, aozet er-maez eus emell ar c'hweluniadoù, a hañval endeo gwall arvaret e donkadur.

Goprou kevredigezhel ha kevredikaat.

Amañ e ranker termenañ un nebeut gerioù. Keyarzhelaat, evel m'hon eus gwelet c'hoazh, a dalvez treuzfurmiñ ar gevredigezh e doare ma vo gant pep hini an hevelep gwirioù ha dreist-holl an hevelep barregezhioù, - er gevredigezh frankizour, ez eus war ar

paper kement a wirioù gant mab ar micherour ha gant mab an embr-egour, nemet war an dachenn e oar an holl ez eo barregezhioù hemañ kalz brasoc'h eget barregezhioù henneth. Kevredikaat zo lakaat e kefridi ar gevredigezh an damantoù a oa diagent e kefridi an hinienn, an tiegezh pe stolloù prevezh all, - da skouer, kevredikaat ar vezekniezh zo lakaat ar gevredigezh da akuitañ ar mizoù kleñved, e-lec'h o lezel war goust ar re glañv. Da heul, dre berzh ar gwirioù piaouet gant ar preveziad e kement ha ma'z eo ezel eus ar gevredigezh ez eur degaset d'ober anezhañ ur c'h-kevredigour, - en hevelep doare ma lakaer an titl a geodedour war neb a biau ar gwirioù roet gant ur geoded d'hec'h izili.

Troioù-lavar zo a ranker mirout a veskañ : ar gopr hinienn, ar gopr stroll, ar gopr tiegezh (anvet a-wechoù goprou hiniennel, strollel, tiegezhel) zo goprou roet d'an hinienn, d'ar stroll, d'an tiegezh; en enep, ar goprou kevredigezhel zo goprou roet gant ar gevredigezh, - d'an hinienn, d'an tiegezh, pe all. Pa vezont roet d'an hinienn, e reer anezho goprou kevredigour, evit diskouez ervat ne vezont ket roet en eskemm d'ul labour, met e-ser ar gwirioù he deus evel ezel eus ar gevredigezh.

Ar goprou kevredigezhel a anver c'hoazh korvoderioù treuzdoug, rak amparet int diwar gorpoderioù all : treuzdouget e vez ul lodenn eus korvoderioù all hag addasparzhet evit ober ar goprou kevredigezhel.

An aozadur foran pe ledforan a zo en e gefridi aozañ ha talañ ar goprou kevredigezhel a reer anezhañ ar Skor Kevredigezhel pe Kedskor.

Diogelerezh Kevredigezhel

Evit parraat ouzh an digresk korvoder hag an arvar a ezeved a zeufe da heul ar c'hleñved, ar gozhni, ha dre vras kement reuz o virout a labourat, ez eus bet krouet ur rumm goprou kevredigezhel e stumm kretadurioù, - kounait e veze anvet kretadurezh kevredigezhel an obererezh-mañ gwechall. An aozadur-kreataat, anvet Diogelerezh Kevredigezhel zo anezhañ ur rann eus ar C'hedskor.

C'hoarvezout a ra an enkefiadurioù eus skodennoù talet war un dro gant ar c'hopriddi hag ar c'hoprerion; hag an ezkefiadurioù eus skorennoù talet d'ar c'hopriddi, anvet neuze diogelidi, da geñver reuzioù diseurt :

- reuzioù al labourer, da lavarout eo o tiraez an diogelad dre

berzh e labour : gwallzarvoudoù labour, kleñvedoù micher;

- reuzioù ar c'hevredigour, da lavarout eo o tiraerz an diogelad pe an dud en e garg (pried, bugale, h.a.) hep keñver ouzh e labour : kleñvedoù, dic'houested da labourat da heul kleñved, kozhni, marv.

Ken diseurt hag ar reuzioù eo ar skorennoù. Anezho ez eus : dastaladurioù ar mizoù mezegel hag apotikel (6); gwaredoù d'ar re a rank arsaviñ a labourat dre berzh kleñved; goprou-amsaviñ d'ar re gozh ha d'ar re aet dic'houest; h.a.

Goprou Tiegzh

E broioù 'zo, Frañs da skouer, ez eus, e-kichen an Diogelerezh, un aozadur distag, mui pe vui kevreet outañ, a zo ivez ur rann eus ar C'hedskor : aozadur ar Goprou Tiegzh. Pal kentañ an aozadur-se, e Frañs da nebeutañ, e voe reiñ broud d'ar genel en ur mare ma koshae ar boblañs c'hall en un doare arvarus. Hep an emsav kevarzhelour avat ne vije ket bet anezhañ, - rak feukus a-walc'h eo d'ar spered frankizour pennaenn ar goprou tiegzh; hag ivez e c'haller lavarout e tizhont, en tu all d'ur pal politikel tremeniat, ur pal kevarzhel gwirion.

N'eus abeg armerzhel ebet da c'hoprañ uheloc'h evit un hevelep labour un tad a familh eget un den dizemez; ha koulskoude ez eo brasoc'h ezhommoù an tad a familh eget re an den dizemez. Aze e tisklot splann ar meno hiniennelour frankizour diouzh ar meno kevarzhelour. Ken anat eo d'ar frankizour e tle pep hini sammañ ar c'hargoù en deus tennet warnañ, ken anat-all eo d'ar c'hevarzhelour e tle ar gevredigezh kensammañ e gargoù gant an hini bec'hietañ.

Kefioù ar Goprou Tiegzh a zegemer skodennoù digant ar c'hoprion hepken. Pouchaset e vez d'an tiegzhioù meur a seurt skorennoù :

- skorenn desavadur, evit ar vugale adalek o ganedigezh betek o 17 pe o 21 bloaz;
- skorenn ungopr, roet d'ar pried (pe d'ar bried) hep korvoder;
- skorenn vrazezded ha skorenn c'hanedigezh;
- skorenn annezadur; h.a.

Kudenn an dic'hwel.

Un arvar all evit ar c'hopriddi eo an dilabour, pe dic'hwel. Dizemglev zo bet etre ar gevarzhelourion hag ar frankizourion a-zivout al leviadur da zegemerout war an dachenn-se. Evit ar re gentañ e tle ar c'hopriddi bezañ kretaet ouzh an dic'hwel dre un aozadur kevredigezhel a dalo dezho ur c'horvodèr-dic'hwel, ur gopr-amsaviñ gwirion. Evit an eil re ez eo ar c'hretadur-dic'hwel gaouus ouzh an armerzh dre ma ro lañs d'un dic'hwel brasoc'h. Padal, en holl vroioù ez eus hiziv kretadurioù-dic'hwel.

Hervez ar broioù e vez aozet ar gretadurezh-dic'hwel e diabarzh an embregerezh pe e-ser gwazadurioù foran pe ledforan dindan reolerezh ar Stad.

E Frañs da skouer e vez talet d'ur gwazadur ledforan ur skodenn par da 1 % eus ar goprou (an 8/10 anezhi e karg ar goprer, an 2/10 e karg ar goprad); gant ar gwazadur-se (ASSEDIC) e vez talet d'an dic'hweleion ur skodenn par da 35 % eus sav keitat o gopr kent e-pad 9 miz da nebeutañ, 12 miz d'ar muiañ.

Er Stadoù-Unanet ez eus bet savelet reizhiad ar G.A.W. (guaranteed annual wage) pe gopradur-bloaz gwarantet; pa rank an embregerezhioù difredañ micherourion e tleont talañ dezho ur gopr-dic'hwel par da 80 % eus o gopr-labour kent e-pad ur bloavezh mar o devez ar vicherourion daou vloaz hended en ti, e-pad c'hwec'h miz mar o devez ur bloaz hended hepken. Seurt emglevioù o reiñ un diogeladur gourc'hwel bras, o sammañ avat kargoù ponner war an embregerezhioù, n'int ket bet astennet c'hoazh, pell diouzh eno da holl c'hennadoù al labour amerikan.

Gopriddi ha poblañs.

Seul vuioùc'h ma vez greantelaet ur vro, seul uheloc'h e sav dregantad ar c'hopriddi en he foblañs-labour. An div daolenn amañ dindan a laka anat an devoud-se :

I. Emdroadur dregantad ar c'hopriddi war 70 vloaz.

Stadoù-Unanet	1880	63 %	Alamagn	1882	64 %	Frañs	1886	57 %
	1954	84 %		1953	72 %		1954	65 %

II. Dregantadoù ar c'hopriddi er boblañs-labour.

Breizh-Veur	1951	93 %	Portugal	1940	72 %	Italia	1936	53 %
St.-Unanet	1954	84 %	Suis	1941	71 %	Island	1946	51 %
Sveden	1950	77 %	Norge	1950	70 %	Hellas	1946	46 %
Saar	1946	74 %	Izelvroioù	1947	69 %	Mec'hiko	1950	46 %
Belgia	1951	74 %	Frañs	1954	65 %	Kolumbia	1938	35 %
Chile	1940	74 %	Luksembourg	1947	64 %	Yugosl.	1953	30 %
Danmark	1952	73 %	Aostria	1953	62 %	Kongo bB.	1952	17 %
Alamagn-G.	1953	72 %	Venezuela	1951	59 %	Pakistan	1951	8 %
			Suomi	1950	58 %			

Oad keitat ar c'hopriddi a vez bihanoc'h eget oad keitat an nanngopriddi. E Breizh-Veur da skouer, emañ ar 67 % eus ar c'hopriddi dindan 44 bloaz, hag ar 41 % hepen eus an nanngopriddi.

Kenfeur ar maouezed e-touez ar c'hopriddi zo 32 % er Stadoù-Unanet hag e Breizh-Veur, 31 % e Frañs. Kalz uheloc'h ez eo an dregantad-se avat evit ar maouezed dindan 25 bloaz.

(1) Kevrat b., emglev, peurliesañ lezennel, etre daou pe lies den pe gevredad.

(2) Kevrann b., gwir roet e stumm un teul (merk, talvoudenn) en eskemm d'an arc'hant pe d'ar madoù degaset evit diazezañ ur c'hevredad kevalaoù pe greskiñ kevala ur c'hevredad; an degaser, pe e gerioù all, ar prener kevran, a reer anezhañ ar c'hevraneg. Gwirioù ar c'hevraneg zo degemerout randdalioù (sl. (3) amañ dindan), kemer perzh e-unan pe dre un dileuriad e bodadegoù-merañ ar c'hevredad, h.a.

(3) Randdal b., lodenn genfeuriek a zegouezh da bep kevraneg pa vez rannet buzadoù ur c'hevredad.

(4) Kengreadur g., hollad an taolioù-kenwerzh graet en ur prantad, en ur bloavezh da skouer; sammad an arc'hant lakaet da dreiñ e-ser an taolioù-kenwerzh-se.

(5) Deur g., interest, emell a gemerer en un dra bennak; deuriat, un deuriad eo an hini en deus deur ouzh udb.

(6) Dastalañ v., talañ d'unan bennak kement hag en deus talet a-raok, divizaouañ : dastalañ louzeier zo digoll ar c'hlañavour, reiñ dezhañ kement hag en deus dispignet d'o frenañ.

Handwritten text, possibly a signature or date, located in the bottom right corner of the page.